

# KIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

## CHANSON NEVEZ

Var don : *An drouc-hirnes* (le mal du pays) *Cetu ar flik a flok*  
Bretonnet, me o ped, didostet da glevet  
Eur c'hiadiad truezus, eun adieu trist meurbet  
A ra de guervroïs quen monet d'ar brezel  
Eur martolod iaouank maguet en Breiz-Izel.

An eiz-varnaguent a viz maë me oa en faction  
Oar bont ma batimant bars er rad en Tonlon,  
O hortos partia vit mont d'an Itali  
Oar ben tri de goude, e cleemp anbarqui.

Me gred a oa tremenet an heur a hanter noz  
A ma c'hamaradet oa et da repos ;  
Netra na drouble neuze ar silanç deuz an noz  
Met ar mor e vurmuri gant eur moës rust a gros.

Ma daou zorn a oa c'harpet oar ma c'harabinen  
Dindan ma zreid ar mor bras ac an Env us d'au fen ;  
Heusi ran va mignonet pa deuan da compren  
Na ve tre 'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis ma unan oar bont ma batimant  
~~Festenn ma glac'h ar nemet ar firmamant~~  
Me goimmancas hirvoudi gant glahar ac anquen  
Pa deuas da jong din a barous Trabien.

Ma daculagat oa troet a zu ar vilajen  
Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerijen ;  
~~A pa deuas da jong jal em c'herent ac cañ bro~~  
Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daëro.

Aboue an devez fatal a meus rentet quittat  
A dont da guimiadi deus ma mam a ma zad  
Bep noz pa ven coussuet em huvre o goëlan  
Ac o jonjal 'n ho glac'h ar noz a de a ouëlan.

O devez leun a c'hlac'h, a sizesper c'hoëro,  
O devez deplorabl a carguet a ganvio  
O quimiad anquenius a glac'harus meurbet  
Me mo jonj ac'hanout queit a vin oar ar bet

Gant ma c'herent er guer e ma nehamant  
Hi ra ma oll chagrin a ma brassant tourmant ;  
Penoz annonci de c'han breman d'ar brezel  
Aoun meus d'ho lacat gant an nec'h d'a vervel.

Pa glevont quement-se a devont calonad  
Goassoc'h vit an devez a renquis o c'huitad,  
Ac hi devo couraj a oalc'h vit gallout supporti  
Ep ma ranno o c'halon gant eur c'helo quen cri.

Houi sperejo evurus, o sœnt a sœntezet,  
Itron-Varia-Drue, ma guir vam biniguet,  
Reït de ners a couraj en ho affliction,  
Reït de ho assistanç, confortet ho c'halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet,  
An amzer-ze quen douç hac agreabl meurbet  
Pelec'h eo et breman an amzer eürus-se  
A oan en Trabien e no toezi bemde.

Niget eo pel d'ouzin an amzer quen eürus  
A oan sambles guenac'h, camaradet joaüs,  
Tremenet e vidon, marteze vit james,  
Ar bonheur ac ar joa m'em tanvet assambles

Pa zeï ann nevez amzer da gargan adare  
Ar guez a vleuio caër ac a zelio neve,  
Pa zeuï e voar e c'his ar guenidel er vro  
Na nimp mui assambles bep sul d'ar pardonniou.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën,  
Mæs breman c'hon mantret, ziouas ! gant an anquen,  
A ma oll plijadur zo bout neur plac disro  
O sonjal gant glac'har em c'herent ac em bro.  
Houi a velfe breman Yvonic, ho mignon ;  
O pourmen e unan oar ar rad a Toulon,  
O pourmen e unan alies tal an nod  
A daëro he zaoulagat a red var e ziouchod.

Me ve c'hoas alies aseet oar eur roc'hel,  
Ma doaulagat troet e var zu Breiz-Izel,  
Mantret gant ar glac'har, a beuet em daëro,  
O sonjal em c'herent zo er guer en canvo.

O douar a Vreiz-Izel, o ma bro biniguet,  
Pegouls a zono an heur ma c'hin c'hoas d'ho kuelet ?  
Pegouls a erruo ar momet ac ann de  
A zeuio da laquat fin d'am c'haptivite ?

O devez leun a zouster, devez a eürustet !  
Me zo sonjal ennout bep heur a bep momet ;  
Doue trugarezus, hastet ar momet-se  
Ma c'hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre ma oant o teplori oar bont ma batimant,  
Ar loar a darzas souden ebars er firmamant ;  
Neuze me a velas us d'am fen o nijel  
Eur guenidel bian evar zu Breiz-Izel.

O ! prest din-me, eonic, prest din da zivesquel  
Ma nigin en ez plac da bete Breiz-Izel,